

— 5 —

Meur a ho tis ep bursud a chanch an dour en guin,
 Meur a blac'h a lak pilhou do rountat e'feultrin,
 Broziou d'ober un tailler, an oll a glask troumpla,
 Vel en amzer tremenet, mèmeus tra, mèmeus tra.

Sepet ar brago toul-gouis, al lero marellet,
 Ar jiletan kof-yodec, ar beruken poultret,
 Ar peur-rest a zo chomet ebarz er stad ma oa
 Vel en amzer tremenet mèmeus tra, mèmeus tra.

PROSPER PROUX.



Kousk Breiz-Izel !



An heol a zo kuzet, setu echu an de,
 Me glev ar c'hloc'h o tintal an Ave ;

DISKAN

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
 Setu an noz o tont var an douar.
 Kousk, Breiz-Izel, bro ker mad,
 Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat.

C'houez vad an ed e bleun bag al lan alaouret
 War ar mêziou gant ar gliz noz a red.

Ar bastored a gân, o testum o loened ;
 Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrous, me glev kân an eostig ;
 Telenner-noz, sonit flour ha dousik.

'Us da Vreiz o skedi, an nenv steredennet
 A lar 'z eus eun Doue ouz hor c'haret.

An neb a c'houez bemdez a c'hounid e repoz,
 D'an dud vad Doue en deus great an noz.

Arvor, ô douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
 Bro-all ken kaer n'eus ket war an douar !

J. MARÉCHAL